





Cooperl : enklask war un embregerezh pemoc'h ramzel



Pell-mat eo Cooperl hiriv an deiz diouzh an hini bet savet e 1964 e Lambaol, pa ne oa da gentañ penn ken met ur strolladig 25 saver moc'h. Deuet eo da vezañ ur gompagnunezh etrevroadel, ur gevelouri a gaver enni 83 kevredad, en o fezh pe evit darn outo, un dek bennak diouto en estrenvro.

Abaoe m'eo bet savet ar gevelouri eo kresket he levezon war holl dachennoù ar sevel moc'h, eus an tiez lazhañ moc'h d'ar savadurioù, hep disoñjal ar fardañ boued evit al loened pe ar salezonoù.

Evit meur a saver loened, pe a-fed etik, pe a-fed o gwenneien, ne gavont ket o c'hont ken. Padal, kuitaat ur gevelouri n'eo ket un dra aes d'ober... Nebeutoc'h c'hoazh pa gomzer eus ar C'hooperl.



Cooperl : enklask war un embregerezh pemoc'h ramzel

Enklask embannet e miz Du 2023

Pell-mat eo Cooperl hiriv an deiz diouzh an hini bet savet e 1964 e Lambaol, pa ne oa da gentañ penn ken met ur strolladig 25 saver moc'h. Deuet eo da vezañ ur gompagnunezh etrevroadel, ur gevelouri a gaver enni 83 kevredad, en o fezh pe evit darn outo, un dek bennak diouto en estrenvro.

Abaoe m'eo bet savet ar gevelouri eo kresket he levezon war holl dachennoù ar sevel moc'h, eus an tiez lazhañ moc'h d'ar savadurioù, hep disoñjal ar fardañ boued evit al loened pe ar salezonoù.

Ha nevez zo eo aet betek postañ hec'h arc'hant war dachennoù un tamm mat pelloc'h eget ar sevel moch, pezh n'eus lakaet saverien-moc'h zo, izili ar C'hooperl, da sevel bec'h enno. Ha seul vuiañ a-se p'emañ ar gevelouri o treuziñ mareoù gwallamzer ekonomikel, gant divigadoù (pe koll arc'hant) uhel a-walc'h diouzh un tu, hag adframmañ e greizenn salezonoù diouzh un tun all. Ha neuze, evit kempouezañ ar c'holl e c'houlenn ar C'hooperl skoazell ar saverien moc'h, en ur izelaat priz prenañ ar moc'h, ur priz kiniget a chom dindan hini ar marc'had, met ivez en ur astenn an termenoù paeañ, pe dre rediañ ar saverien moc'h da fiziañ ul lodenn eus gopr o gwerzh war gontoù ar gevelouri.

En tu all d'ar redioù-se war ar prizioù ez eus bet lakaet un toullad mat a redioù all evit ar saverien izili ar C'hooperl : pe a-fed savadurioù, boued, prederioù ar medisined-loened, merañ an distaolioù, kazi pep tra a vez didan e evezh, ha mat evit gounidoù ar C'hoop.

Evit meur a saver loened, pe a-fed etik, pe a-fed o gwenneien, ne gavont ket o c'hont ken. Padal, kuitaat ur gevelouri n'eo ket un dra aes d'ober... Nebeutoc'h c'hoazh pa gomzer eus ar C'hooperl.

Tremenet tro-spered an enframmañ en tu all d'ar roudenn gant un doare nevez : deuet eo ar gevelouri perc'henn war seizh atant, dreist-holl evit diorren an enklaskoù genetek gant e gevredad « Nucleus ».

Ivan Logvenoff ha Kristen Falc'hon

Piv eo Splann !

Splann ! a zo ur gevredigezh (mod lezenn 1901) a zo he fal dezhi kas da benn enklaskoù-kazetenniñ poellek evit an dud e Breizh hag ar bed, e galleg ha brezhoneg. E Bro-Dreger, e Gwengamp, emañ staliet. A-drugarez da zonezonoù an dud e c'hall *Splann !* Goprañ kazetennerien da labourat war an hir-dermen hag embann enklaskoù war e lec'hienn internet hag e lizher-kelaouiñ.

LODENN 1



UN TOULLBAC'H ALAOURET EVIT AR SAVERIEN MOC'H

..... page 5

Miz Here 2023. Prederiet eo un toullad eus saverien moc'h ar C'hooperl ouzh mont en-dro o c'hevelouri. Boued, louzoù evit al loened, gouennoù moc'h : gant brasañ kevelouri sevel moc'h ar Frañs e vez lakaet da redioù an darn vras eus an dibaboù teknikel. Daoust d'ar goulennoù groñs-se, ha da briz ar c'hilo kig-moch paeet dindan priz ar marc'had, ral eo ar re a gred uhelaat o mouezh evit embann o soñjoù enep.

LODENN 2



UR C'HOANT KRESKIÑ DIWAR GOUST AN DESAVERIEN

..... page 17

En tu all d'an daou di salezonoù bet serret, bilañsoù diwezhañ kontoù ar C'hooperl ha meur a lizher diabarzh a ziskouez splann diaesterioù ekonomikel meur oberour pennañ ar sevel moc'h er Frañs. Hervez an desaverien hag an arbennigourien ez eo disoc'h ugent vloaz postadurioù arc'hant e-barzh obererezhioù pelloc'h-pellañ diouzh ar produioù labour-douar. En ur framm a ro da welet un identelezh kevelouri, abaoe 40 vloaz n'eus ken met ur familh zo bet e penn ar jeu evit e gas d'ur vent bras-meurbet.

LODENN 3



AN ATANTOÙ BET PERC'HENNET GANT AR C'HOOPERL

..... page 27

Diwar an teuliadoù hag a oa bet fiziet ennomp ez eo sklaer eo ar C'hooperl perc'henn war seizh atant, penn-da-benn pe evit ul lodenn diouto : un atant arnodiñ, daou atant sevel saout ha pevar atant sevel moc'h gouestlet d'ar genetek moc'h Nucleus.

Boest du

E-doug an enklask-mañ hon eus bet tro da gas un tregont bennak a bennadoù-kaoz, ur pemzek bennak diouto gant desaverien moc'h, pe gant tud bet oc'h Ober ar vicher, izili ar C'hooperl evit lod outo. Etre miz Ebrel ha miz Du 2023 eo bet kaset ar pennadoù-kaoz-se da benn, pe dre bellgomz, pe en atantoù. Meur a wech eo aet aozerien ar pennad-mañ da Lambaol hag en trowardroioù evit gellat kas ar pennadoù-kaoz en-dro.

Diwar an 20 desaver moc'h bet tizhet eo bet asantet gant 14 outo respont deomp, met dindan guzh bepred, war-bouez ur saver moc'h hag ur merour eus ar C'hooperl. Gellat hon eus bet kaozeal ivez gant pemp den, micherourien pe bet micherourien e labouradeg Lambaol hag e lec'hioù all perc'hennet gant ar C'hooperl. M'eo bet asantet gant lod eus ar sindikalourien toullañ kaozganomp ez eo gant ma c'hellent chom dindan guzh, re all o doa nac'hed diganeomp gellat komz diwar-benn an doareoù labour en o labouradeg. Un diouer a sklaerder a ziskouez splann pelec'h eo erru an divizoù sokial e diabarzh an embregerezh..

Evit gellat kaout resisadurioù diwar-benn an elfennoù bet diskoachet ganomp e-doug hon enklask hon eus bet goulennet kaout tro da gomz gant meur a hini, merourien ar C'hooperl, prezidant kozh ar gevelouri, hag ar renerezh. N'eus ket fellet da rener ar gevelouri, Emmanuel Commault, eskemm ganomp dre bellgomz. P'eo bet pedet dre vail renerezh ar c'hehentiñ he deus kaset ac'hanomp war-zu he danevell vloaziek RSE, hep reiñ tamm resisadur war hon goulennoù difer.

Dont a ra sifroù disoc'hoù ar c'hevredadoù diwar meur a gont sokial ha diwar gontoù startaet ar gevelouri hon oa bet dindan stumm ur Pdf evit ar bloavezhioù 2020 da 2023. Kartenn an is-gevredadoù zo bet renablet diwar an elfennoù bet daspugnet e diabarzh ar c'hontoù-se, ha dre-se n'heller ket lakaat war-wel ar prenañnoù zo bet kaset da benn nevez zo. Ez-ofisiel ec'h embann ar gevelouri e vefe 83 is-gevredad en holl.

Diazezet eo bet sifroù l'EBE ar broduerien moc'h diwar diaz roadennoù ar Memento a vez embannet bep bloaz gant Ministrerezh al Labour-douar, diwar gontoù al labourerien-douar o-unan.

Deuet eo an holl roadennoù diwar-benn ar prenañ atantoù zo bet tennet diwar un dielfennadur eus ar c'hontoù-se, ha diwar an teuliadoù melestradurel a c'heller kaout diwar-benn an atantoù-se...

Heulit ac'hanomp war ar rouedadoù sokial



@Splannenquetes



@Splannenquetes



Splann lanceur
d'enquêtes



@Splannenquetes



Splann

UN TOULLBAC'H ALAOURET EVIT AR SAVERIEN MOC'H

Miz Here 2023. Prederiet eo un toullad eus saverien moc'h ar C'hooperl ouzh mont en-dro o c'hevelouri. Boued, louzoù evit al loened, gouennoù moc'h : gant brasañ kevelouri sevel moc'h ar Frañs e vez lakaet da redioù an darn vras eus an dibaboù teknikel. Daoust d'ar goulennoù groñs-se, ha da briz ar c'hilo kig-moch paeet dindan priz ar marc'had, ral eo ar re a gred uhelaat o mouezh evit embann o soñjoù enep.



Kristen Falchion

- 】 Saverien moc'h paeet dindan feur marc'had ar moc'h e Breizh.
- 】 Redioù kevratel gant redioù strishoc'h-strishañ evit mad ar framm pa n'eo ket evit hini ar saverien loened.
- 】 Ur mont-en-dro gouzañvet evel unan « aotrouniel » ha n'eo ket « kevelourel ».

G wall deuc'h an aergelc'h e sal an ehanoù en atant sevel moc'h tost da Lambaol, an deiz-se eus dibenn miz Gwengolo. Sebezet eo Sylvain¹ pa ziskoach war skramm e urzhiataer ar priz kinniget gant ar C'hooperl evit e voc'h : « 1,85 € dre ar c'hilo, da lâret eo 11 santim nebeutoc'h eget marc'had ar moc'h e Breizh. Gra ar jedadenn da-unan hag e weli pegement a vanko din ! »

Gwall zister e seblant ar sammad dre ar c'hilo. Met pa vez 300 gwiz o produiñ tamm-pe-damm 175 pemoc'h tost da gant kilo bep sizhun, pezh a vank en e chakod n'eo netra dindan 7.000 € evit ur miz ! Biskoazh kement all, pa ouezer emañ ar gevelouri e penn marc'had ar moc'h er Frañs, gant tro 5 M a voc'h lazhet bep bloaz, 2.300 saver moc'h ezel eus ar gevelouri ha 7.000 implijad : « Fougheet eo ar C'hooperl evit bezañ er penn a-raok, ha padal n'eo ket gouest da vont a-skouer gant priz ar re all ! Evel pa vefes paeet dindan ar Smic », eme ur saver moc'h all, hegaset.

Poan zo gant an daou saver loened kompren petra zo kaoz ma ne ya ket ken prizioù ar C'hooperl a-rez gant re varc'had dave Plevin, an hini bet savet e 1962. E-kreiz Marc'had ar Moc'h e Breizh (MPB), ar werzh diouzh ar c'hresk a vez da Lun ha da Yaou. Un dave evit peurrest ar Frañs eo disoc'hoù ar werzh. Ha koulskoude,

dindan renerezh Emmanuel Commault eo bet divizet gant ar C'hooperl kuitaat ar MBP e 2015², pa soñje dezho e veze lakaet en arvar ar marc'had eziporzhiañ, abalamour da briz ar c'hilo kig moc'h, re uhel d'o meno. Hag abaoe e vez paeet ar saverien moc'h hervez ar prizioù embannet gant ar C'hooperl. Kenderc'hel a rae da brenañ miliadoù a voc'h bep sizhun memestra, betek miz Here 2023, p'eo bet divizet gant ar C'hooperl chom a-sav penn-da-benn gant ar prenañ moc'h.

UN DOARE PAEAÑ GWALL LUZIET

Diskleriañ a ra ar C'hooperl ez eo marc'hadmatoc'h ar servijoù dreistwerzhad (pe « talvoudegezh ouzhpenn ») hag ar sistem arc'ho-proù faturennet ganto, pezh a zo un avañs evit ar saverien loened. « Ret eo bezañ pizh oc'h ober e gontoù e dibenn ar bloaz », a bouez da skouer Didier Lucas, saver loened ha prezidant Kamb Labour-douar Breizh, ezel eus ar C'hooperl ivez. Hervez ur sifr bet diazezet gant prizachourien ar burev CerFrance³ ha diskoachet da geñver emvod-meur ar gevelouri e 2022, « degaset e vez ur gounidegezh a 410€ ouzhpenn keidenn ar Frañs evit pep gwiz en un atant sevel moc'h ».

Goude bezañ bet o selaou meur a saver moc'h ezel eus ar C'hooperl ez eus

1] Pa vez tud gant un anv bihan hepken e talv eo bet cheñchet an anv.

2] « Crise porcine : la Cooperl ne sera pas présente à la prochaine cotation à Plérin », T.P. Gant an AFP, France 3 Breizh, miz Eost 2015

3] « Confrontée à des inflations majeures, Cooperl garde le cap », CerFrance, Emvod meur ar C'hooperl, 2022



Gall a ra an desaverien moc'h gounit arc'hant dre an dreistwerzhadoù (pe plus-value e galleg).

bet kadarnaet deomp n'emaint ket pell diouzh priz marc'had ar moc'h e Breizh, ha se a-drugarez d'ar sistem dreistwerzhad. Evit bezañ resis, an darn vras eus an dreistwerzhad zo e-liamm gant feur kigennoù an tam-moù-kig (TMP). Da lâret eo e-liamm gant kalite ar c'hig, dre un istimadur a vez kaset da benn gant an tiez-lazhañ chatal. Pa vez tizhet 61 % TMP gant ar c'hig degaset gant saverien zo e c'hellont neuze pakañ betek 17 santim ouzhpenn dre gilo, un doare da gempouezañ mat a-walc'h an digresk ordin war ar priz diazez. Ha pa vez prenet gant ar saverien loened ar


boued chatal Cooperl, pe pa sentont ouzh kaier kargoù diabarzh a-fed kig hep bevestalerioù (antibiotik), war ar pared nann-spazhet e c'hell ar gevelouri aotreañ betek 6 santim dre gilo ouzhpenn en holl d'an holl.

UR PRIZ DIAZEZ HARPET GANT AN FNSEA

Sistem an dreistwerzhad (pe « talvoudegezh ouzhpenn ») zo degemeret ingal a-walc'h e bed al labour-douar, e metoù an tiez lazhañ chatal hag an treuzfurmieren kig. Evit pezh a sell ouzh ar feur kigennoù e vez embannet da skouer gant marc'had ar moc'h e Breizh e vez

SISTEM ENFRAMMADUR AR C'HOOPERL

Cooperl
EQUIPEMENTS



Setu penaos e ya en dro ar sistem enframmanñ (intégration e galleg) evit desaverien ar C'hooperl.

roet ez-ofisiel etre 4 ha 16 santim ouzhpenn⁴ evit un TMP etre 57 % ha 63 %. Gant ar gevelouri Porc Armor⁵ e vez kinniget betek un arc'hopr eus 8,5 santim dre gilo zoken, evit loened n'int ket bet desavet gant bevastalerioù. Estreget gant ar C'hooperl e vez roet arc'hoproù neuze.

« Pezh a gont eo ar priz diazez. Normal eo e vefe paeet gant ar filierennoù un dra bennak ouzhpenn evit ar saverien chatal a ra strivoù ouzhpenn ivez », eme François

Valy prezidant kevread broadel ar sevel moc'h (FNP), ur gevredigezh ispisializet e diabarzh an FNSEA. « Pezh zo, kement a gargoù e kement a gaieroù, kollet-mik omp : ezhomm bras hon eus e vefe ur priz diazez reizh », a ouzhpenn Yann. Gant ar sistem dreistwerzhad e vez broudet ar saverien moc'h da asantiñ ouzh an enframmanñ (pe intégration e galleg), da lâret eo da vezañ muic'h-mui e dalc'h o c'hevelouri. Yann ma vez displeget gant Yann : « Ma fell dit tapout

4] « La grille de rémunération en fonction du TMP », Marc'had moc'h Breizh, lec'hienn internet bet lennet d'ar 5 a viz Meurzh 2024.

5] « 90 % de leurs porcs dans la filière « sans antibiotiques » », Paysan breton, lec'hienn internet Porc Armor, miz Gouere 2020

an dreist-gwerzhadoù diwar-benn ar bevastalerioù hag aezamant al loened (chom hep spazhañ ar moc'h bihan NGAS), ha kaout gounidoù an abretañ ar gwellañ, ret-mat eo dit tapout ar boued chatal hag al louzoù digant ar C'hooperl. »

SAVERIEN MOC'H EREET

« Ur sistem enframman ha ne lâret ket ez eo, setu ar C'hooperl e gwirionez », a zispleg Sylvain, saver moc'h an Aodoù-an-Arvor hag ezel eus ar C'hooperl abaoe dek vloaz a-boan. An enframman (pe intégration e galleg) – ur ger n'heller lâret war porzh an atantoù – a dalvez e eus ur gevrat etre ur saver loened hag e gevelouri, ha dre-se eo engouestlet an desaver da zoujañ ouzh ar reolennoù diwar-benn ar mod da verañ ar magañ loened, ar pourchas doareoù produiñ pe c'hoazh gwerzh an danvezioù aozet. « N'omp ket mestr ba'r gêr ken gant

« Eus produiñ moc'h da broduiñ magadur ar moc'h. »

ar c'hevratou-se », emezañ, keuz en e vouezh. Ur santimant bezañ rediet evit pep dibab teknikel, setu pezh a zeu en-dro e komzoù meur a zesaver hon eus bet tro da atersiñ. « Laouen 'vefen kaout muioc'h a frankiz », a lâret deomp Ewen ivez.

Evit bezañ resis, rankout a ra pep desaver ezel eus ar C'hooperl sinañ ur gevrat pourchas boued evit pemp bloaz,

Kinnig a ra ar C'hooperl gwerzhañ boued evit al loened. Ha gant-se e vez graet kalz arc'hant gant ar gevelouri.

Kristen Falchon



E 2012 eo bet kinniget gant ar C'hooperl chom hep spazhañ ar moc'h. Nebeutoc'h a labour a zo evit al labourerien-douar.

gant kaieroù kargoù resis : moc'h savet hep bevestalerioù adalek o ganedigezh ha betek o 42 vet deiz, moc'h savet en o aezamant, label ruz... Pep tra a gas an desaverien da rankout tremen dre servijoù ar gevelouri goude-se : adalek ar boued chatal betek an ti lazhañ moc'h, en ur dremen dre ar genetek ha produioù medisinerezh al loened. Met ouzhpenn ar redioù-se, ar frejoù merañ.

Savet hon eus goulennoù da servij kehentiñ ar C'hooperl war an afer-se. Lâret zo bet deomp eo titouroù a ne sell ket ouzhomp pa vez komzet eus dreistwerzhad pe gevreadoù. « D'an izili hepken e vez roet an titouroù-se. »

STRATEGIEZH TUET WAR BRODUIÑ MAGADUR

Alies-mat e vez meneget ar servij pourchas boued ar moc'h evit an desaverien. Hervez kontoù bet embanet ez eo deuet da vout un obererezh pennañ evit ar C'hooperl. Pa lârer mat, gwerzhañ boued chatal da zesaverien rediet da brenañ diganto a gas da unan eus brasañ sifr aferioù evit ar gevelouri, gant tro 500 M€, evit ar bloaz 2022, da lâret eo teir gwech muioc'h eget gwerzh ar moc'h evit ar charkuterezh (164 M€). « Gwelloc'h e kav d'ar C'hooperl ober gounidegezh war gein an desaverien kentoc'h eget en em gannañ gant an dasparzherezh bras », a zispleg unan eus an izili kozh.

Ken abred ha 2006 e oa bet an desaver-se gant re all ivez o klask lakaat renezh ar gevelouri war ziwall war ar mont a-dreuz-se a vefe diorren ar gwerzhañ servijoù, hervezo. Bodet eo strolladig an Desaverien emren, en ur gevredigezh hag a ginnige prenañ en ur mod emren produioù zo a c'helle bezañ kavet marc'hadmatoc'h eget digant ar C'hooperl, evel an digontammer pe al louzoù evit yec'hed al loened.

AR PARED N'INT KET SPAZHET, HIGENN AN ENFRAMMAÑ

Didro e anzav Ewen : « *An dra nemetañ a ro c'hoant din chom ganto eo ar pared ne vezont ket troc'het.* » Evel meur a hini all e rank anzav eo bet kemeret un diviz kalonek gant ar C'hooperl ken abred ha 2012, hag a oa kinnig da chom a-sav gant ar spazhañ ar moc'h bihan. Un engouestladur evit aesaat buhez al loened, gant ar riskl da reiñ ur c'hwezh displijus d'ar c'hig⁶.

Un doare ober hag a zigresk ar garg a labour, hag a ro tro d'ar moc'h lardañ evit ur c'houst disteroc'h. Hervez studiadennoù a c'heller lenn⁷ e vez debret 14 % nebeutoc'h a voued gant ar pared ha n'int ket troc'het, daoust ma kreskont memestra, hag o deus ur c'hementad kigennoù uheloc'h zoken. « *Gwelloc'h eo talvoudekaet ar moc'h e mod-se. Daoust d'ar savadurioù kozh em*

atant em eus gellet gounit gwelloc'h ma buhez evel-se », a anzav Didier Lucas, prezidant kamb labour-douar Aodoù-an-Arvor heg ezel eus ar C'hooperl.

Ronan a oa bet teknisian ar gevelouri ha deuet eo da vezañ desaver moc'h emren, hag evitañ, lakaat e plas ur c'haier kargoù war « *aezant ar moc'h* » (ar pared n'int ket spazhet) a zo bet evit ar gevelouri un doare splann da greñvaat o hentenn enframman a gas ar saverien moc'h da vezañ kalz muioc'h dindan dalc'h ar gevelouri. « *Ur blegenn nevez eo bet ober moc'h n'int ket spazhet, rak morailhet eo pep tra bremañ. Ret eo bremañ d'an desaverien moc'h prenañ an dafar genetek hag al louzoù evit al loened. Met ivez ar magadur evit ar moc'h yaouank-flamm, hag aze e vez graet ur gounit bras-tre gant ar C'hooperl.* » « *Kresket eo bet an enframman abaoe ma vagomp moc'h n'int ket spazhet* », eme Gilles ivez.

Philippe, ur medisin loened e penn ur c'habined ispisializet war an desaverzh moc'h, klaouiañ an doare-se a zo deuet diwar abegoù ekonomikel da vat ha n'eo ket abegoù yec'hed pe biologiezh : « *Nag ar magadur nag ar genetek o deus tra da welet gant ar fed desevel moc'h en ur chom hep spazhañ anezho, n'eus abeg teknikel ebet da rediañ kement-se an desaverien* », emezañ.

6] « Odeurs indésirables de la viande de porcs mâles non castrés : problèmes et solutions potentielles », Séverine Parois, Michel Bonneau, Patrick Chevillon, Catherine Larzul, Nathalie Quiniou, Annie Robic, Armelle Prunier, INRAE Productions animales, miz Even 2018.

7] « Effets de la non castration (mâles entiers ou vaccinés) sur les performances d'engraissement et le comportement des animaux, la qualité des carcasses et le défaut d'odeur dans la viande : comparaison avec des mâles castrés et des femelles », Sandrine Dufourny, Viviane Planchon, Vincent Servais, Jean-Michel Romnee, Martine Laitat, José Wavreille, Devezh an enklask war ar pemoc'h, 2014



Ret e vez d'an desaverien paeañ 7.62 € evit pep pemoc'h ha n'eo ket bet roet d'ar C'hooperl.

LAKAAT AN TIEZ LAZHAÑ MOC'H DA DREIÑ

Digresket eo eus 3%⁸ an niver a voc'h eus ar C'hooperl tremenet dre an tiez lazhañ etre 2021 ha 2022, evit tizhout an niver a 4,6 milion pemoc'h. En ur blegenn evel-se eo deuet da vezañ ken strategel mirout e izili ken ma vefe bet divizet, hervez komzoù ar re bet goulennataet ganeomp, ma vefe kreñvaet gant ar gevelouri ar c'hastizoù war an desaverien moc'h a glaskfe dilezel an embregerezh. « *Ma vefent ken kreñv a-se, n'o defe ket ezhomm stagañ an dud evel-se evit ma chomfent ganto. Pezh o deus ezhomm e gwirionez eo e vefe produet d'an nebeutañ 6 milion penn moc'h ar bloaz evit ma lakfent o*

binviji da vont en-dro », eme Yann gant dipit.

Hervez ar c'homzoù-se e vefe deuet ar C'hooperl da vout « *kalz muioc'h prosezerez* ». Pa seller pizh ouzh ar c'hevraoù pourchas boued chatal e weler eo stag an desaverien gant o c'hevelouri evit pemp bloaz. Met betek-henn, na gant Cooperl na gant ar c'hoperativoù all ne veze ket lakaet an diferadenn-se da dalvezout, ha disoursi e veze roet en-dro o lodenn gevredad d'an izili a felle dezho mont kuit, hep pleidiñ gant an deiziadoù termen kevrat. Ul lizher bet kaset gant ar C'hooperl, a c'heller lenn war lec'hienn Porelia⁹, ur strollad saverien moc'h, a ziskouez splann da skouer eo bet nac'het d'un desaver

8] « Confrontée à des inflations majeures, Cooperl garde le cap », CerFrance, Emvod meur ar C'hooperl, 2022

9] Lizher kaset gant ar C'hooperl d'un den perzh eus ar strollad Porelia, lec'hienn internet Porelia, miz Eost 2021

moc'h kuitaat diwar an abeg m'en defe ket doujet ouzh ar badelezh rakkemenn a dri miz. « *Laosket e vezont da vont kuit gant kazi an holl koperativoù ! Se zo gwashoc'h eget strishaat an doareoù labour e-keit m'eo izeloc'h ar priz eget hini ar marc'had !* », a huanad Ewen, un desaverer moc'h hag ezel ar C'hooperl a fellfe dezhañ cheñch kevelouri.

Strishoc'h ivez ar C'hooperl war an diferadenn er c'hevratoù a lak anezhi da vezañ an hini nemeti da zegas moc'h an desaverien izili. Rak en un endro gwallgaset, p'eo prenet ar moc'h ganto d'ur priz izeloc'h eget hini ar marc'had, e vefe techet desaverien zo da vont da welet lec'h all, daoust ma rankfent neuze paeañ 7,62 € a gastiz evit pep loen ne vefe ket degaset d'ar C'hooperl. Hervez Sébastien Lamour, bet dilennet e sindikad al Labourerien Yaouank, ha bet dave an desaverien evit ar sindikad, « *un dek*

bennak a saverien moc'h » o defe bet ur weladenn urcher abaoe deroù ar bloaz 2023, evit ma vefe gwiriet ganto ar werzh moc'h e diavaez kevrat. Hervez tud all e vefe bet ar C'hooperl o c'houlenn groñs bezañ restaolet sammadoù a ya betek kantadoù milieroù a euroioù evit ar moc'h bet gwerzhet da gevezerien ar C'hooperl.

Hervez Laurent Dartois, mab prezidant bet ar C'hooperl, kontet eo bet gevier gant ar gevelouri dirak ar justis. Gant Laurent Dartois e vije goulnennet bezañ paeet ar pezh a dlee dezhañ ar

C'hooperl. Ha d'an embregerezh da c'houlenn 250.000 € dezhañ rak sañset e vije bet gwerzhet pemoc'h er-maez eus ar gevelouri. Faos e oa an titouroù-se. « *Diaes eo bet mont kuit, diskouez e oa eus un doare all d'ober* », eme Laurent Dartois.

UN TAMM MAT A C'HOUNIDOÙ EVIT AN DESAVERIEN

Daoust d'ar goulennoù a sav ennañ diwar-benn an doare ma vez meret ar gevelouri, sklaer eo memestra e anzav Ewen emañ o tennañ un tamm brav a c'hounidoù gant an desevel moc'h. « *Gant lod e vez paket goprou medisined, ha se zo un abeg evit na vefe ket pismiget gant an darn vras eus ar saverien moc'h.*

D'o soñj emaint o vont da c'hounit pa vez graet gounidoù gant ar C'hooperl », setu preder Jean-Marc Thomas, mouezh aotreet kengevread ar beizanted evit ar rannvro. Rak ma rank an desaverien

moc'h labourat eurioù hir bemdez, ha ma n'o deus ket nemeur a vakañsoù, diouzh pezh hon eus gallet klevet en atersadennoù ez eo live o goprou a zeu da heul : gounit 4.000 da 5.000 € rik beb miz ne vefe ket dibaot evit rener un atant moc'h bras a-walc'h. Padal e vez desaverien moc'h o c'hounit kalz nebeutoc'h.

War an dachenn broadel, kadarnaet eo bet gant ministrerezh al Labour-douar ez eo ar sevel moc'h an obererezh gounidusañ a vefe e bed al labour-douar. E-tro ar bloavezhioù 2019-2021, a-ramp war

Kreñvaet eo bet ar c'hastizoù war ar re a glaskfe mont kuit



Ur skeudenn vras he deus c'hoant kaout ar C'hooperl. Ganti eo bet respontet deomp n'o deus ket c'hoant ar renerien reiñ titouroù deomp.

enkadenn ar C'hovid ha brezel Ukraina, reñverad korvoiñ kriz (EBE) an desaverien moc'h a yafe da à 95.000 € dre vras dre atant, hervez hor jedadennoù. Dre ma tiskouez ar werzh ouzhpennet (VA) a paket gant an embregerezh goude ma vefe tennet ar frejoù koskor, ar sifrise a verk ur sammad uheloc'h e bed an desaverien moc'h eget e forzh peseurt doare gounidegezh. Ar gounidegezhioù ispisializet evel an avaloù-douar hag al lin, hag ar gwini, a vez sellet outo evel an daou zoare gounidegezh a bae ar gwellañ, a ro un EBE kreiz eus 77.000 € ha 67.000 €. « *Mat e c'hounezomp hon buhez* », a anzav François Valy, prezidant Kevread broadel an desaverien moc'h (FNP).

Abeg pe heuliad, gant an desaverien moc'h e vez ivez « *live uhelañ ar postañ arc'hant e bed al labourerien-douar* », hervez enklask ministrerezh al Labourdouar. E-keit m'eo bet postet dre vras

war-dro 30 000 € gant an atantoù er Frañs etre 2019 ha 2021, gant an desaverien moc'h ez eus bet postet tro 61.000 € evit modernaat ha brasaat o atantoù, an div drederenn evit ar savadurioù. Hervez ar pennadoù-kaoz hon eus graet e vefe an dispignoù-se ar re gentañ graet gant an desaverien yaouank pa rankont en me staliañ, etre 1 M€ ha 3 M€ hervez niver al loened hag an aveadurioù rekiz. « *Ma vezes prezhus ar C'hooperl eo kalz aesoc'h kaout arc'hant eus an tiez bank* », eme Ronan.

« *Gant ar savadurioù ez out bac'het buanoc'h c'hoazh eget gant ar pourchas boued. Ur wech tapet ganit disoc'hoù ar C'hooperl evit ober war-dro an distao-ladoù loened, (fank hag hañvouez) pe evit mirout ouzh ar moc'h bihan da vout flastret, aze n'hellez ket kuitaat ken* », a zispleg Ronan. Kinnig e zoareoù teknikel evit ober war-ro ar postadurioù arc'hant-se a vefe ur mod all evit

ar C'hooperl da virout e saverien moc'h. Goude bezañ bet adprenet Rolland Environnement an embregerezh¹⁰ tretañ an hañvouez e 2021, n'eus ken met ar C'hooperl a c'hell dastum an diastaolioù diwar an atantoù bet degemeret an Trac da skouer, ar sistem rozell-se a zisparti an danvezioù fetis diouzh an dourennoù, pezh a c'houlenn e vefe implijet doareoù teknikel resis evit ma vefent kaset kuit eus an atantoù.

LAKAAT AN DISRANNERIEN DA DEVEL

Evit mirout diouzh an desaverien moc'h da guitaat ar gevelouri ez eus bet staliet gant ar C'hooperl morailhoù teknikel koulz hag ekonomikel, met en ur wareziñ strizh ar skeudenn a ro diouti. « *E C'hooperl e kaver gwelloc'h ober kouez pell diouzh selloù an dud* », eme un dilennad FNSEA a fell dezhañ chom dizanv. Hag e ouzhpenn c'hoazh : al lizher bet skrivet e miz C'hwevrer 2023¹¹ koulz gant ar sindikad kreñv-se hag hini al Labourerien Yaouank evit pismigañ digresk ar prizioù e-keñver ar MPB ne oa ket ur gemennadenn, met « *ur c'hehentiñ diabarzh evit an izili hepken* ». « *Na roit ket ma anv, mod-all e c'hellfen pakañ fest ar vazh* », eme Yann c'hoazh, nec'het anezhañ. N'eo ket dianav d'an desaverien moc'h an doareoù ma c'hellont pakañ taoùlioù kenkaz ma vefent o kaozeal d'ar

« Na roit ket ma anv, mod-all e c'hellfen pakañ fest ar vazh »

gazetennerien. Aon zo gant meur a saver moc'h bet goulennataet ganeomp ma vefe diwezhat ma vefe kaset moc'h o atant d'an tiez lazhañ, gant ar riskl ma vefent tevaet en tu all d'ar pouez aotreet gant an tiez lazhañ.

E miz Even 2023, da geñver an emvod-meur e oa bet ur strolladig 8 desaver moc'h o klask lakaat e kaoz strategiezh ar renerezh. Kresket eo bet neuze niver a verourien eus 24 da 32¹², evit skañvaat evel-se pouez an disrannerien. « *Ur gwir gudenn demokratelezh a zo. Ne vez ket selaouet mouezh an izili* », a eilger unan eus ar verourien a gendalc'h da stourm en diabarzh. Diouzh e du, Bruno Hamon, merour er C'hooperl abaoe 2012, a zegemer stad an traoù evel m'emaint, ha displegañ a ra n'eo

10] « Cooperl rachète Concept Rolland Développement », Yannick Le Bihan, *Porc mag*, miz Gwengolo 2021

11] « Informations aux adhérents FDSEA/JA, éleveurs de porcs : inquiétude pour les éleveurs face au décrochage du Cooperl », FRSEA ha JA Breizh, war lec'hienn internet Porelia, miz C'hwevrer 2023

12] « Responsabilité sociétale de l'entreprise », Rentañ kont 2022, Cooperl, miz Even 2023

ket ar C'hooperl « *ur c'huzul kêr, ne glas-ker ket kaout tud a-enep. Klas a reomp sevel ur c'huzul merañ unvan tamm-pe-damm evit kemer divizoù a-zoare evit ar gevelouri.* »

MANKOÙ DEMOKRATEL

Chom a ra desaverien zo etre kounnar ha gouzañv e-tal kement a vankoù demokratel. « *N'ez an ket d'an emvodoù-meur ken* », eme Ewen gant dipit. « *Kalz goulennoù zo gant an desaverien moc'h, met nebeut a respontoù a vez roet dezho. Me 'gav din ez omp erru e penn ar sistem kevelouri.* » N'emañ ket a-du tamm ebet penn-renerien ar C'hooperl gant se : « *Eskemmet e vez alies mat gant hon c'hevelourien. Dreist-holl pa vez eus hon emvodoù-meur e lec'h ma vez moaien d'an desaverien sevel a bep seurt a c'houlennoù* », eme an den e-karg eus ar c'hehentiñ en embregerezh.

Gant un toullad mat a labourerien-douar

bet selaouet ganeomp ez eus bet dispaket teodadoù, en ur zisplegañ an diaesterioù a vez ganto evit klask kuitaat ar sistem lakaet e plas gant ar gevelouri. « *Rak n'eus ken met an atantoù brasañ a c'hell dont da vezañ emren ha gwerzhañ war-eeun da tiez-lazhañ Lerclerc e Kermenez, pe re ar Socopa (Strollad Bigard) e Gras (22)* », a zispleg Ronan. Un atant a rank kas ur c'harrad a voc'h bep sizhun, eme an teknisian kozh, da lâret eo kaout d'an nebeutañ 400 gwiz evit gallet adpakañ koust an transportoù. Ar re a vez nebeutoc'h a voc'h ganto n'o deus dibab ebet all nemet chom dindan ar C'hooperl, pe c'hoazh da glask klask o chañs gant kevelourioù all evel Evelup, Eureden pe c'hoazh Porc Armor. « *A-benn ar fin ne chomo er C'hooperl nemet ar verourien, hag ar re a zo dindan dle* », a zispleg Gilles c'hoazh.

Kristen Falc'hon ha Ivan Logvenoff

UR C'HOANT KRESKIÑ DIWAR GOUST AN DESAVERIEN

En tu all d'an daou di salezonoù bet serret, bilañsoù diwezhañ kontoù ar C'hooperl ha meur a lizher diabarzh a ziskouez splann diaesterioù ekonomikel meur oberour pennañ ar sevel moc'h er Frañs. Hervez an desaverien hag an arbennigourien ez eo disoc'h ugent vloaz postadurioù arc'hant e-barzh obererezhioù pelloc'h-pellañ diouzh ar produioù labour-douar. En ur framm a ro da welet un identelezh kevelouri, abaoe 40 vloaz n'eus ken met ur familh zo bet e penn ar jeu evit e gas d'ur vent bras-meurbet.



Kristen Faichon

- » Embannet eo bet e oa koll war an disoc'hoù rik, hag e vefe serret daou di salezonoù : diaesterioù ekonomikel gant ar C'hooperl.
- » Erru ezhommoù arc'hantaouiñ ar strollad Cooperl en tu all d'ar pezh eo gouest sevel : goulenn a ra a renerezh digant ar saverien moc'h ma vefe kompezet ar bilañsoù.
- » Postadurioù arc'hant pelloc'h-pell diouzh an desevel moc'h.

N'eus ket moaien tremen hep ober gant produioù charkuterezh ar C'hooperl pa 'z eer d'ober e brenadennoù er stailioù bras, p'emañ ar gevelouri o fardañ kig-moch evit ar merkoù Brocéliande, Madrange, met ivez re ar merkoù dasparzherien evel Carrefour, Casino, pe Lidl. N'eo ket stank koulskoude ar vevezerien a oar e oa bet savet ar gevelouri-se, aroueziet gant ul logo a gaver damguzhet war ar pakadurioù, ken abred ha 1964 gant 25 desaver moc'h, evit tizhout dindan hanter-kant vloaz ment ur strollad feuriet er CAC 40.

Gant tro 4,7 milion pemoc'h a vez lazhet evel-se bep bloaz er Frañs, hag ur sifr aferioù¹ o tizhout 2,7 miliard a euroioù ha gant tost da 8.000 implijad, emañ ar C'hooperl o ren tammpe-damm 83 kevredad. En estrenvro e kaver un dek bennak anezho, eus Sina d'ar Stadoù-Unanet, en ur dremen dre Rusia, ar Viet-Nam, Aod-an-Olifant, an Izelvroioù, ar Suis pe ar C'hanada.

Abaoe ar bloavezhioù 1980 o doa kaset postadurioù arc'hant zo bet niverusoc'h-niverus abaoe ar bloavezhioù 2000, ha deuet a-benn ar gevelouri da vestroniañ penn-da-benn ar chadenn broduiñ moc'h, hag evit-se lakaat e pleustr ur strategiezh gounid tachenn, met diwar skouer ar c'hengreizañ a-blom. Gant lod eus o is-kevredadoù e vez lazhet ar moc'h, lod all a fard ar c'hig, lod all a sav magadur evit ar moc'h, lod all c'hoazh a werzh louzoù evit al loened

pe danvezioù sevel tiez zoken.

Pell-mat eo lod eus is-kevredadoù-se diouzh ar sevel loened. Deuet eo Lambaol, kavell ar gevelouri, da vezañ rakstal al liesseurtat p'eo bet degemeret eno ur metanaer divent bet igoret e 2019, ha gant ul labouradeg produiñ louzoù evit ar yec'hed (heparin, un enep-kaouledus prim ensinklus), ul labouradeg digor abaoe 2022.

An is-kevredadoù all, bet prenet pe savet abaoe 2020, evel Aqua Eco Culture, Rolland Environnement pe c'hoazh CFMA a sav bezhin, robotoù evit tretiñ distaolioù ar sevel moc'h, pe gwerzhañ stummadurioù e bed ar gounez-vouederezh. Kement a seuroù liesseurtat



83 is-kevread a zo gant ar C'hooperl, betek Bro-Sina. Amañ e Linzhoù e weler un atant gant 1.500 gwizi.

1] « Confrontée à des inflations majeures, Cooperl garde le cap », CerFrance, Emvod meur ar C'hooperl, 2022



War ar renk evit bezañ klozet emañ div uzin salezon ar C'hooperl en Erge-Vras (Lampaulaise de Salaisons) hag e Goussainville e Val-d'Oise (Paul Prédault).

ha ne c'hounezont ket o boued dre ma vez koll arc'hant ganto hervez an disoc'hoù bet embannet hini hag hini : 1,7 M€, 1,2 M€ ha 330 K€ evit ar bloaz 2022.²

AN TREUZFURMIÑ LAKAET DIAES

Moaien zo displegañ ul lodenn eus diaesterioù ekonomikel ar C'hooperl hiriv an deiz gant ar postadurioù arc'hant-se. Gant an obererezhioù treuzfurmadur dreist-holl. E dibenn miz Gwengolo 2023, eo bet embannet gant ar gevelouri e vefe kaset da benn un « *adframmadur* » evit al labouradegoù salezon. Ha n'eo ket lâret ne vo ket serret re an Erge vras, e-tal Kemper,

(Lampaulaise de Salaisons) kement hag hini Goussainville er Val d'Oise (Paul Prédault) e 2024. « *Abaoe an diska-ramzer dremenet [2022, NGAS] e rank ar C'hooperl talañ ouzh kudennoù kresk uhel ar prizioù ha n'eo ket bet gouest da zisteurel penn-da-benn, abalamour da re-
dioù ekonomikel ar galloud prenañ e-touez traoù all* », eme renerezh strollad Aodoù -an-Arvor evit en em justifiañ e-barzh ur pennad d'ar gazetennerien.

E 2017 e oa bet prenet an daou lec'h, da geñver adprenañ gant ar C'hooperl eus meur a gevread eus ar strollad Turenne-Lafayette³, pa oa hennezh din-dan freuz-stal barnerezhel. Met n'eo ket aet stad arc'hant an uzinoù-se war wellaat abaoe m'int bet prenet. Hervez

2] Dielloù arc'hant ar C'hooperl Arc Atlantique, lez-varn kenwerzh Sant-Brieg, miz Eost 2023

3] « L'Autorité de la concurrence autorise la prise de contrôle de l'activité de charcuterie salaison de Financière Turenne Lafayette (Paul Prédault, Madrange...) par Cooperl Arc Atlantique (Brocéliande) », aotrouniezh kevezañ, miz Here 2017

«Diaes eo kaout an titouroù ar muiañ a bouez.»

un implijad eno : « *mankout a ra war-dro un drederenn ampled e pep labouradeg evit ma trofent da vat : dre chañs n'eo kouezhet an adframmadur ken met war an daou lec'h-se evit poent* », eme ur micherour ha fell dezhañ chom dizanv. « *Ur bloavezh met-tre eo bet 2023 evit an desaverien moc'h, met n'eo ket ken mat evit ar C'hooperl* », eme diouzh e du Bruno Hamon, desaver moc'h ha merour kevelouri Lambaol. Hag eñ da ouzhpennañ : « *Bloavezhioù zo a vez diaes. Met pa serrer lec'hioù bet lakaet diaes e reer evel ma rafe pep tad a familh* », ha dre e gomzoù e ro e asant ouzh strategiezh ar C'hooperl.

Diwar dielfennañ ar sifroù kaset da benn ganeomp e vefe en holl d'an holl tro 50 M€ a goll war ar gounidoù etre 2019 ha 2022 evit ar pevar c'hevredad bet adprenet digant ar strollad Tuernne-Lafayette. Brocéliande, merk istorel morzhed-hoc'h ar C'hooperl, ne 'z a ket kalz gwelloc'h kennebeut, gant

tro 12 M€ a goll war disoc'hoù an hevelep prantad amzer. Ha ne seblant ket gwall lañsus postadurioù arc'hant zo bet graet en estrenvro : daou is-gevredad eus ar C'hooperl e Sina (NHL Cooperl JV ha Cooperl Beijing Trading) a gas o-daou da 11,6 M€ a goll war ar gounidoù evit ar bloaz 2022 hepken, p'emañ ar c'hevredad genetek en Thailand (Thaifood Nucleus Genetics) o vont war ur c'holl a 650 K€.

Ha lakaet e vefe ar strollad en arvar gant kement a goll ? Poan zo gant an izili desaverien moc'h koulz ha gant ar sindikalourien kaout

respontoù d'o goulennoù. « *Goulennet ez eus bet ma vefe prizachet ar c'hontoù met diaes eo bet d'ar prizacher kaout an titouroù ar muiañ a-bouez* », hervez displegadennoù ur sindikalour. Heñvel ar goulennoù savet gant ar CGT-Cooperl war Facebook eo bet embannet e miz Gwengolo 2023. Pa verzh ez eo erru izel goprou ar vicherourien ha digresket gounidoù an desaverien moc'h e soñj d'ar sindikad emañ « *gopridi kouz ha desaverien deuet da vout an « argemenn reizhañ » (variable d'ajustement e galleg) evit politikerezh arc'hant an embregerezh* ».

DOAREOÙ ARC'HANTAOUIÑ DIAES DA LONKAÑ

Abaoe dibenn ar bloavezhioù 1980 eo bet postadurioù arc'hant ar renerezh e-liamm gant ur bromesa : dre un emouestlañ e hollad an hentenn – adalek ar produiñ boued chatal evit ar moch betek ar gwerzhañ



Kristen Fañchon

E pep lec'h eus ar produiñ kig moc'h emañ ar C'hooperl : eus ar boued a vez roet d'al loened betek ar c'hig moc'h a vez gwerzhet.

merzhed-hoc'h – e vefe uheloc'h gou-
nidoù an desaverien moc'h. « *Alies-mat
e lârer penaos, er Frañs, seul vui ma c'hel-
lit reoliañ en ardrañ d'ar marc'had, seul
vui ma c'hellit pakañ gounid. Ur c'hempouez a ranker kaout koulskoude etre
koust ar frammoù hag ar pakañ talvou-
degezh* », eme Maryline Filippi, ekono-
mourez arbennikaet war ar c'hevelou-
rioù labour-douar. Hag an desaverien
moc'h o-unan da sevel goulennoù ivez
war ar c'hempouez-se a ranker kaout.
« *Aozet ez eus bet ur sistem evidomp da
bakañ gounidoù. Met an holl c'hounidoù
bet dastumet gant an hentenn en dialaez
zo bet tapet gant ar mekanik a oa sañ-
set profitañ deomp-ni* », eme gant keuz
an desaver moc'h Jacques Bohardy er

gelaouenn Porcmag e 2009.⁴
Er C'hooperl, etre an tiez lazhañ moc'h,
ar produiñ boued chatal hag al labou-
radegoù charkuterezh « *abaoe tri ru-
mmad tud e vez goulennet diganeomp
peurbaeañ koust ar binviji industriel
evit ar rummadoù da zont. Met n'omp
ket kreizennet war hor micher ken, ha
diskrog omp diouzh ar marc'had ivez* »,
eme Yann⁵, ezel ar C'hooperl, dipit en e
vouezh. Meur a hini, desaverien moch
eveltañ, ne gomprenont ket ken pe-
seurt talvoudegezh zo gant an diorren-
se, na pelec'h eo erru tachenn ar geve-
louri hiriv an deiz.
Hervez ar redioù lezennel e rank pep
adprenañ pe krouidigezh kevredad be-
zañ bet asantet gant ar c'huzul merañ,

4] « Avenir porcin : notre histoire éclaire notre présent », Jacques Boishardy, Porc mag, 2009

5] *Pa vez tud gant un anv bihan hepken e talv eo bet cheñchet an anv.*



E 2019 eo bet savet ur metanizer e Lambal (Lambaol), lec'h m'az eo bet ganet ar gevelouri.

ha goude-se votet e-doug an emvod-meur. « *E-doug emvodoù zo e vezomp ke-laouet, met ken luziet eo erru ar prientiñ arc'hantaouiñ ma n'hell kazi den en em gavout en-dro, ha pa vefed kontouer.* », eme Mael, un desaver moc'h laouen memestra dre ma c'hell kaout fred evit ar moch bet savet gantañ.

TAPET BERREK AN DESAVERIEN MOC'H

Gant ar C'hooperl eo bet lakaet klaoustre war hec'h izili desaverien moc'h evit talañ ouzh an diaesterioù, evel m'eo bet kadarnaet e-barzh daou lizher he deus bet kaset dezho. E miz Ebrel 2023 eo bet kemennet en ul lizher kentañ e vefe digresket priz prenañ ar moc'h e-skoaz hini marc'had ar moc'h e Breizh (MPB). E 1972 e Plerin (Aodoù-an-Arvor) e oa bet savet ar marc'had diouzh ar c'hresk gant skoazell ar C'hooperl, a oa sañset bezañ un

dave evit ar brenerien koulz hag evit ar werzherien.

Hagen tu all eus ur priz aet war zigresk e oa bet kemennet gant ar renerezh el lizher-se e vefe meur a vuzul o vont enep an desaverien moc'h : ampellet an termen paeañ, eus 6 da 10 devezh, ha broudet an desaverien da leuskel produ o gwerzh war ur « *gont-red kevelet* ». E berr gomzoù : dav eo d'ar gounidoù e-liamm gant gwerzh o loened bezañ lakaet da greskiñ kapital ar gevelouri, evit talañ ouzh an ezhom bras a bostadurioù arc'hant.

Ha setu ar stignad-se, bet diazezet war izili a-youl vat, deuet da vezañ ur redi e miz Gwengolo 2023. En un eil lizher eo laouen ar renerezh da embann eo bet « *tridoublet abaoe pemzek vloaz* » ar c'hapitalioù engouestlet. Da lâret eo abaoe m'eo bet anvet Emmanuel Commault da rener. Met e gwirionez : « *Lodenn relativel*

ar c'hapital sokial dindan dalc'h an izili o-unan [...] zo digresket » e-tal kresk an holding Cooperl, gant ar riskl da « wanaat ar ren war » ar gevelouri.

El lizher ez eo displeget ivez e vo digresket c'hoazh priz prenañ ar moc'h. Met al lodenn a vanko d'an desaverien a yelo da voueta « lodennoù sokial espern ». Da lâret eo e yelo da greskiñ kapital sokial ar gevelouri.

FREALZIÑ AR BOSTERIEH ARC'HANT A-RAOK AN DESAVERIEH MOC'H

Evit gwir, kevala (pe kapital) sokial ar gevelouri a zo e dalc'h hec'h izili a zegas ur sammad a-live gant pezh a broduont d'ar mare ma teuont e-barzh. Gant an ekonomour Olivier Frey eo degaset ar bennaenn-se da soñj deomp : « *Ur gevelouri n'hell ket bout prenet dre ma n'heller ket gwerzhañ lodennoù sokial an izili.* » Evel m'eo meneget el lezenn, ar postourien arc'hant diavaez n' hellont nemet dont e-barzh kevala an is-kevredadoù. Dibosupl eta e vefe tennet da vat digant an desaverien ar gallout kontroliñ o c'hevelouri.

Pezh zo bet kemennet nevez zo a c'hellfe neuze bezañ un doare da brientiñ an dud da glevet ez eus disoc'hoù negativel da c'hortoz, pe e rankfe an tiez-bank kaout gwarantoù ouzhpenn. « *An tu mat p'eo ken bras ar c'hevala, eo e c'heller gwarantiñ kaout un amprest pa c'houlenner unan, ha da ziskouez ur bilañs frealzus evit an arc'hantourien* », eme c'hoazh Patrice Drillet, a oa e penn ar C'hooperl betek miz Even 2023.

RAKTRES AN DIAZEZERIEH LAKAET E KAOZ

Fuloriñ a ra Laurent Dartois, mab unan eus prezidanted kozh ar re anavezetañ ar C'hooperl, hag aet da zesaver moc'h en ur gevelouri all : « *Ur soñj kaer eo bet en em vodañ etre peizanted evit gellet ober kenwerzh asambles. Met dre m'eo kresket ar gevelouri e oa peadra da zae-lañ. Postadurioù arc'hant e-leizh, er Frañs koulz hag en estrenvro ha n'int ket spletus, ha desaverien moc'h ar vro n'int ket paeet da briz ar marc'had e Breizh !* »

Gant diazezerien ar C'hooperl e oa bet damwelet ar c'hudennoù a oa da zont gant seurt postadurioù arc'hant, evel m'eo meneget el levr bet embannet gant ar gevelouri hec'h-unan da geñver

he 50 vloaz. Pa oa bet krouet e oa bet gwarantet gant ar strollad ur « *frankiz a bourvezadur* » ha distaolet e veze ganto ar soñj

« *enframmañ* (pe intégration e galleg) evit broudañ ar gevezerez *pourveziñ, servijoù hag hini an tiez-lazhañ chatal* ». Difennet groñs e veze en atantoù distagañ ar ger « *enframmañ* », rak se a dalveze e vefe sinet ur gevrat etre un desaver moc'h hag ar gevelouri, ha neuze e veze engouestlet an desaver loened plegañ dirak reolennoù mont en-dro an desevel moc'h, met ivez ar *pourveziñ* boued chatal ha louzoù, kement hag ar gwerzhañ al loened.


Adalek ar bloavezhioù 1970, hag e-tal an diaesterioù ekonomikel e oa bet ar gevelouri oc'h en em silañ tamm-hattamm en hent-se koulskoude, dre ginig ambroug an desaverien moc'h evit al

louzaouiñ loened pe evit ar sevel savadurioù. Met pa oa bet adprenet daou di lazhañ loened e 1978, e Moñforzh e-tal Roazhon hag e Lambaol, aze e oa krog ar C'hooperl da « voulc'hañ an troc'h kentañ », hervez komzoù kentañ prezidant ar C'hooperl, Sébastien Coupé.

Jean-Claude Commault a chomo skeudenn an hini en deus roet ul lañs nevez hag un diorren a-vas d'ar gevelouri. Anvet e oa bet da bennrener ar C'hooperl e 1982, goude bezañ bet e-karg eus ar genetek ha goude-se rener ar strollad. Gantañ eo ma vo adprenet al labouradegoù fardañ boued chatal Logeais e Gwitreg. N'o doa ket bet aon an izili da gas da soñj en-dro d'ar renerezh pennaennoù diazez ar gevelouri koulskoude, « *hag entanet e oa bet an tabutoù er c'huzul merañ* ». Gilles, bet saver moc'h ha kuitaet gantañ ar gevelouri

er bloavezhioù 2000 abalamour d'an dizemglev don gant ar rener kozh a lâr deomp : « Fellout a rae dezhañ staliañ un uzin fardañ boued chatal bep 100 km, hag un ti lazhañ bep 150 km .

En desped d'ar pismigoù-se ec'h anzav memestra an desaver moc'h ez eo Jean-Claude Commault un den barrek war e vicher ha tost ouzh an desaverien loened. Meuleudi ha ne glever gwech ebet lâret, estreget gant un den eus ar melestradur, nag en uzinoù, nag en atantoù, diwar-benn e vab, Emmanuel Commault. Rak hennezh eo koulskoude en deus bet adtapet penn ar renerezh e 2007, hag en doa liesseurtaet an oberezhioù mioc'h c'hoazh, hag o staliañ ren ur familh hepken e penn ar strollad evit un daou-ugent vloaz bennak. P'hon eus bet klasket mont e darempred gant Emmanuel Commault dre bellgomz evit



Plañs ul lodenn eus un uzin eus ar C'hooperl e Lambal (Lambaol).

kaout sklerijenn diwar-benn stad ar C'hooperl en doa respontet deomp « *Mat ar jeu ganin, aet on da redek ar mintin-mañ* », ha di- varc'het ar pellgomz gantañ...

DINDAN VELI

« *Un den debret gant ar c'hoant gal- loud, ha ne anzav gwech ebet bezañ graet ur fazi bennak* », eme Laurent Dartois, mab ur prezidant bet, keuz en e vouezh. Kadarnaat a ra evel-se pezh a embann ar sindika- lourien ha desaverien moc'h zo.

Dindan renerezh Emmanuel Commault ez eus bet adprenet Brocéliande e 2010, pezh a verke e oa erru ar gevelouri war un dachenn ha ne oa bet ergerzhet gant kevelouri saverien moc'h ebet betek-henn. Hag ur bazenn ouzhpenn p'eo bet prenet ivez un embregerezh fardañ morzhed-hoc'h, o tiskouez e oa ar C'hooperl war hent an enfram- mañ a-blom : goude an didammañ kig, ar salezonoù. « *Ar strollad nemetañ a zo perc'henn war un embregerezh didammañ kig eo ar C'hooperl* », a gendalc'h Thomas Guégan, prezidant rann saverien moc'h an FRSEA Breizh.

An hevelep hentenn diorren zo bet la- kaet da dalvezout gant ar C'hooperl p'eo bet embannet war an ton bras e miz Ebrel 2021 eo bet adprenet an ti lazhañ Gad e Lambaol Gwimilio (29). En un emvod kelaouiñ bet aozet ganto o-daou eo bet embannet gant Emmanuel Commault ha Loïc Chesnais- Girard, prezidant Rannvro Breizh⁶ e oa

« 500 post labour ha n'eus ket eus anezho. »

bet krouet « *500 post labour* » war al lec'h a oa bet serret e 2013, padal n'ez eus bet krouet hini ebet abaoe. Olivier Le Bras, brudet mat evit bezañ bet sin- dikalour en ti lazhañ ha dilennad e tu ar muiañ-niver er C'huzul Rannvro a ro deomp da c'houzout : « *Pa vez emban- net an traoù evel-se e roer spi d'un toullad mat a vicherourien, hag an istor-se a chom poanius evit kalz a dud amañ. Aze hon eus paket ur flac'had evit un eil gwech.* » Savet hon eus goulennoù d'ar rennerien diwar- benn ar sujed-se met n'o deus ket bet c'hoant respont deomp.

Emmanuel Commault eo ivez en deus lakaet tamm-ha-tamm ar C'hooperl da vont er-maez eus hollad frammoù a-stroll bed ar sevel moc'h. « *Pellaet omp diouzh peurrest an hentenn* », eme Ewen. Goude ar reuz a oa bet pa oa bet kui- taet Marc'had Breizh ar moc'h e 2016 gant an embregerezh Bigard, eo aet ar C'hooperl kuit eus ar framm etre- micherel Inaporc hag eus an hentenn

6] Tweet eus Loïc Chesnais-Girard, war rouedad sokial X, miz Ebrel 2021

kig (Culture viande) e 2020, heg eus Kevredad Frañs an embregerezhioù charkuterezh ha tinellerezh (Fict) e 2021. E-touez an abegoù bet kaset war-raok evit justifiañ ma'z afent kuit, « un diouer a dreuzwelusted » a-fet arc'hant⁷, hag « *un diefedusted war danvezioù zo* ». Dres pezh o deus da rebech an desaverien moc'h hiriv an deiz ouzh ar gevelourien. « *Pa vez traoù ha ne blij ket deoc'h ken e rankit kemer divizoù ha mont kuit* », a zispleg Patrice Drillet, prezidant ar gevelouri etre 2013 ha 2023.

Koll arc'hant e is-embregerezhioù zo, strategiezhoù diorren luziet evit an izili, ur renerezh lakaet an arigrap warni gant ur familh hepken : estreget er C'hooperl eo e vez kavet seurt kudennoù e bed ar c'hevelourioù all al labour-douar. E rann

ar saverien sukr ez eus bet reuz ivez er strollad Tereos e 2018, gant un enkadenn renerezh heñvel a-walc'h liammet gant un enkadenn ekonomikel. Tri merrour zo bet lakaet er-maez dre ma ebent ouzh strategiezh ar renerezh zo aet dirak ar justis, gounezet eo bet ganto ha laket eo bet ar rener kozh er-maez d'e dro... En o roadennoù dave⁸ diwarbenn doareoù merañ ar c'hevelourioù e tiskler splann an enklaskerien Bertrand Valiorgue ha Xavier Hollandts e reont gant ar gerioù « *emveliezh ar renerien* » eus doareoù ober ar c'hevelourioù-se, pezh a vir ouzh pep hini da gaout « *un doare ensell seder ha kempouez war mont en-dro ar gevelouri* ».

Kristen Falc'hon ha Ivan Logvenoff

7] Tamm eus ur pennad bet embannet gant Porelia e miz Eost 2021

8] « Référentiel pour une gouvernance stratégique des coopératives agricoles », Bertrand Valiorgue, Xavier Hollandts, skol-veur Arvern, miz C'hwevrer 2016

AN ATANTOÙ BET PERC'HENNET GANT AR C'HOOPERL

Diwar an teuliadoù hag a oa bet fiziet ennomp ez eo sklaer eo ar C'hooperl perc'henn war seizh atant, penn-da-benn pe evit ul lodenn diouto : un atant arnodiñ, daou atant sevel saout ha pevar atant sevel moc'h gouestlet d'ar genetek moc'h Nucleus.



- 】 Gant ar C'hooperl ez eus lodennoù e seizh atant. Prenadennoù a chom kuzh p'emaint kontrol diouzh mont en-dro ur gevelouri.
- 】 E-barzh lod eus an atantoù sevel moc'h askoridik emañ ar strollad o tiorren an enklaskoù genetek war e ouenn moc'h a vez graet Nucleus.
- 】 Dre ar prenamennoù emañ ar gevelouri o tapout krog er sevel leueoù ivez, war batrom ar sevel moc'h.

Ha krog da vat e vefe ar C'hooperl gant prenañnoù atantoù sevel moc'h ? Dinac'han a ra renerien ar C'hooperl, p'int bet goulennet gant Agra Presse e miz Gwengolo 2023¹ : « [Adprenañ atantoù] n'emañ ket e-barzh l'ADN ar gevelouri. Ma vefemp lodennerien en atantoù e lakfemp hollad an izili da gemer riskloù », a gadarna Patrice Drillet, prezidant ar gevelouri etre 2013 ha 2023. Evit dileuridi zo eus bed al labour-douar ez eo ul linenn n'heller ket treuziñ zoken. « A-enep emaomp. Klevet hon eus kaoz eus kemer lodennoù e atantoù bet lakaet diaes, tri pe pevar bloaz zo, met ne oa ket evit padout », eme c'hoazh François Valy, prezidant Kevredad broadel ar saverien moc'h. Sklaeroc'h c'hoazh eo Charlotte Kerglonou, mouezh aotreet ar Gengevredad Peizanted en Il-ha-Gwilen : « Digor omp war veur a zoare staliañ peizanted, met ret eo d'an atantoù chom etre daouarn ar saverien loened, ha n'eo ket etre re ar gevelouri. »

Etre daouarn ar C'hooperl koulskoude, lodennoù zo eus seizh atant, evel m'eo lakaet sklaer war teuliadoù kontouriezh bet studiet ganeomp. Kuzh e chom ar prenañnoù-se, dianav zoken d'an arbennigourien war an dachenn. « *Din da c'houzout n'eo ket bet adprenet atant ebet penn-da-benn gant kevelouri ebet. Prederiet eo an holl gant ar reneveziñ rummadoù. E-sell emaint da ginnig amprestoù feur mann pe da gemer lodennoù met en ur*

chom ar bihan-niver memestra », a zispleg Olivier Frey, ekonomour ispisializet war ar c'hevelourioù.

Ma c'heller fiziañ en teuliadoù me-lestradurel² a c'heller diskoachañ, er bloavezhioù 1990 e oa krog gant ar postadurioù arc'hant kentañ. Met aet eo an traoù war-raok abaoe 2019. E-barzh pemp eus an atantoù-se n'eo bet kroget gant ar postadurioù arc'hant a-boan pemp bloaz zo zoken. Heñvel eo bewech ar mont en-dro : pa oant tapet en ur blegenn, tost da vont war o leve, pe gant diaesterioù arc'hant, e oa krog ar C'hooperl da bostañ arc'hant evit ul lodennig hepken da gentañ a-drugarez d'an is-embregerezh Gufa Beausoleil, a-raok adprenañ hollad al lodennoù. A-drugarez d'ar postadurioù-se deuet tamm-hatamm eo erru ar C'hooperl da vezañ perc'henn nemetañ pevar atant sevel loened, keveler muiañ-niver da 85 % en un atant, ha kevelet bihan-niver eus etre 20 % ha 49 % eus al lodennoù evit daou atant all.

DAOU ATANT DINDAN AOTRE

Un dachenn arnodiañ³ eo bremañ La Ville-Poissin, e Henant-Bihan, hini kentañ eus an atantoù bet prenet gant ar C'hooperl. War e lec'hienn internet e tispleg ar strolad gounez-vouederezh e talvez da « *arnodva evit an obererezhioù enklask ha diorren war dachenn ar boued a-raok ma vefe kroget da lakaat war ar marc'had disoc'hoù*

1] « Entre coopératives et exploitations, les frontières bougent », Agra Presse, miz Gwengolo 2023
2] Dielloù justis bet embannet gant SCEA le Bas Chemin, lec'hienn internet Pappers, bet lennet e miz Meurzh 2024

3] « Apporter le bon nutriment, en bonne quantité, au bon animal, au bon moment », Cooperl, miz Meurzh 2020



E Henant-Bihan eo bet prenet ti-feurm kentañ ar C'hooperl. La Ville-Poissin a servij hiziv evit enklaskiñ war ar genetek.

amprouet an enklaskoù », e-touez traoù all. « Ar fed ma vefe un atant arnodiñ ne cheñch netra en holl d'an holl : un enframmanñ eo bepred, ha kaset betek ar penn pellañ zoken. Produiñ moc'h a reer, mont da reont da lardañ hag echuiñ a reont evel kig-moc'h », eme Charlotte Kerglonou eus Kengevread ar Beizanted, disfiz en he mouezh.

Hag ezhomm a oa kaout un atant ken bras ? Hervez an teulioù ofisiel e veze graet « staliadur rummet evit gwarez an endro » (ICPE) eus atant La Ville-Poissin, ha dindan reolenn an aotreoù⁴. Gant ar reolenn-se, an hini strizhañ evit pezh a sell ouzh an atantoù rummet, ez eo rediet sevel un enklask foran a-raok digeriñ un obererezh sevel chatal, zo bet dalc'het gant Greenpeace evel dave termeniñ an atantoù-uzinoù. Hervez an nomenkladur ofisiel e vez lakaet da dalvezout adalek 750 plas gwiz. Da lâret eo tro peder gwech keidenn ment un atant sevel moc'h.

En holl e ra daou atant sevel chatal ar C'hooperl a zo dindan reolenn an aotreoù. An atant all, war gumun Maoron (56), zo bet gouestlet d'al lieskementiñ an Nucleus, ar ouenn moc'h bet savet gant ar C'hooperl dre an diuzouennañ genetek.

Obererezh ar genetek, diorroet dindan stumm ur gevvelour tro ar bloavezhioù 1970, zo deuet da vout un isgevredad penn-da-benn eus ar C'hooperl er bloaz 1994 (sellit ouzh al lodenn 1 eus hon enklask). Gant 5 M€ a zisoc'hoù e 2022 evit ar gevredigezh staliet e Sina, ha 300.000 € evit an obererezhioù er Frañs, e c'heller lâret ez eo hiriv an deiz unan eus ar rannoù a zegas ar muiañ a c'hounid d'ar strollad.

GWIZI A SERVIJ AN ENFRAMMANÑ

Ar pevar atant a oa da labourerien-douar o vont war o leve, adprenet int bet gant ar C'hooperl evit bezañ gouestlet da ziorren ar genetek Nucleus, o tispakañ evel-se kement ostilh e servij an enframmanñ (lennit ar pennad kentañ). « *Ur ouenn sperius-kenañ eo Nucleus, hag uhel-mat eo hec'h askorad kig, padal n'eo ket troet ar vamm ouzh he moc'h bihan kement-se. E servij an tiez lazhañ eo, ket e hini an desaverien moc'h* », evel ma rank anzav Ronan⁵, bet teknikour er C'hooperl. P'emañ o voc'hañ, ur wiz a c'han tro pemzek porc'hell dre vras. Met dre ma n'eo ket troet ar wiz d'ober war-dro he moc'h bihan emañ ar perc'hell en arvar da vout gloazet pe flastret gant ar wiz. « *An holl a oar ez eo ur ouenn diaes ober ganti, ha n'eus disoc'h all ebet eget hini ar c'haouedoù pouezerez* », eme Ronan c'hoazh.

Ur sistem nevez evit desevel moc'h bihan zo bet diorroet gant ar C'hooperl gant ar spi gwareziñ ar perc'hell diouzh o mammoù ha ne warezont ket anezho a-walc'h.

4] Diell bet graet gant ar SCEA La Ville-Poissin, lec'hienn internet Géorisques, bet lennet e miz Meurzh 2024

5] *Pa vez tud gant un anv bihan hepken e talv eo bet cheñchet an anv.*

« Gouennadoù a servij al lazhtioù ha pas an desaverien. »

Gronnet e vez ar gwizi gant barrennoù hag uhelaet un disterañ war un doare savenn heloc'h a ro plas d'ar perc'hell da gaout bronnoù ar wiz hep bezañ en arvar da vout flastret. Un doare saveteiñ ar moc'h bihan a goust tro 2.000 € an tamm, gant ar c'haouedoù pouezerez-se⁶ ez eo kraouiet un tamm muioc'h ar saverien moc'h a felle dezho magañ moc'h yaouank, pa 'z int bet rediet da gaout ar ouenn Nucleus en atantoù dindan ar gevelouri. Evel m'eo bet karded deomp gant Ronan : « *N'heller ket bezañ er C'hooperl ha chom hep ober gant ar ouenn Nucleus.* »

Karget eo atantoù ar C'hooperl d'ober war-dro diuzouennañ (seleksioniñ) ar pared. Da lâret eo da zastum had an tourc'hed. Goude-se e vez implijet an had-se war al lec'h, pe kaset da atantoù all lec'h ma kaver saverien moc'h « liesaerien » a zo o vont da broduiñ gwizi yaouank a implijer evit reneveziñ an tropelladoù. Strizh-tre eo an doareoù desevel moc'h evit ober

war-dro ar gwizi-se, dre ma vo kaset al loened da atantoù all er Frañs, d'an Europa pe zoken da Sina : silet e vez an aer, kaouedoù pouezerez ha produiñ hep bevastaler (antibiotik) : « *Ar pal eo gwarantiñ d'ar bratikoù ul live yec'he-douriezh gant pared ha pared, hag evel-se dispartañ ar muiañ posupl barregezhioù genetek al loened,*

en ur izelaat ar muiañ an dispignoù yec'hed », a zispleg deomp un implijad eus ar gevelouri bet goulennetaet gant ar gelaouenn Réussir Porc⁷, ur gelaouen a servij da vru-dañ an nevezentioù war dachenn an desevel loened stank-ha-stank, pe askoridik. Hervez Bruno Hamon, merour er C'hooperl, moaien zo displegañ an dibab adprenañ atantoù gant ar gevelouri dre ma 'z eus ur riskl ma yafe an desaverien moc'h kuit eus un devezh d'egile. « *Ezhomm hon eus mirout an dorn war an diuzouennañ moc'h. Pouezus-tre eo an tiezfeurm-se evidomp.* » Dreist-holl pa weler eo gant an is-gevredadoù genetek e vez graet ar muiañ a arc'hant. Gant Nucleus France eo bet embannet un disoc'h eus 250.000 € e 2021. Gant embregerezh e Sina Cooperl genetics eo bet graet 4,7 M€.

PA GROG AR C'HOOPERL GANT AR DESEVEL LEUEOÙ

Feuket eo bet Michel, desaver loened

6] Eskemm war forum labour-douar 3trois3 diwar-benn interestoù ha koustoù ar gaouedoù, bet lennet e miz Meurzh 2024

7] « Deux jeunes créent leur atelier de multiplication Nucléus », Claudine Gérard, Réussir Porc, miz Even 2016

e korn-bro Gwipri-Mezek (35) p'eo bet diskoachet e oa bet adprenet un atant desevel moc'h gant ar C'hooperl en e gêr e 2019. « *N'eo ket pal ur gevelouri prenañ atantou. N'eo ket gant an dra-se e c'hellimp staliañ tud yaouank. Gant ar C'hooperl e vez meret ar prizioù dija, lakaet da redi prenañ boued chatal diganto hag implijout o genetek ! Ma teu da vezañ perc'henn war an atantou ouzhpenn-se, ne chomo met un den e penn an traoù, hini rener ar gevelouri* », eme an desaver hegaset.

A-drugarez d'an daou is-embregerezh, ar c'hevredadoù Azur hag Avenir, eo erru ar strollad Cooperl da vezañ perc'henn an atant sevel moc'h kozh e 2010. Adheñchet eo bet obererezhioù an atant evit mont war-zu an desevel leueoù da vezañ lardet, war batrom an desevel moc'h, lec'h m'eo dispartiet kolenourien ha larderien. Un dibab justifiet gant Bruno Hamon abalamour d'ar redi ampletiñ ti lazhañ loened ar C'hooperl e Saint-Maixent (79) « *a ra un nebeud leueoù dija* » met ivez gant an ezhomm da « *enebiñ ouzh Bigard* » *keveler pennañ ar gevelouri war an dachenn.*

Efedus eo bet an atant gant 200 plas evit al leueoù betek 2019, pa 'z eo bet aotreet ar Chooperl gant ar prefeti da vrasaat an atant betek 800 plas⁸. Brasaat evel-se en deus roet tro da anavezout anvioù ar berc'henned gwirion, hag alese eo bet savet a-enep un toullad tud ha lod eus ar sindikadoù. Evel ma lâr ar Gengevredad Peizanted en ul lizher bet skrivet d'ar 7 a viz Mae 2019 : « *N'eo ket renet an atant-se gant labourerien-douar, met gant ur strollad*



Daou eus an ti-feurm bet prenet gant ar C'hooperl a zo techet da c'houlenn an aotre da vezañ savet rak ez eus ouzhpenn 750 loen.

industriel bras », hag arouezius eo eus « *an diouer a gontroll gant al labourerien-douar war o hentennoù produiñ hag war o ostilhoù labour* ».

E-tal an tabutoù-se e tiviz Thierry Beaujouan, maer Gwipri Mezek en em deurel en ur prosezadur. Dalc'het eo bet ur breud kentañ d'an 19 a viz Here 2023⁹ dirak lez-varn melestradurel Roazhon evit nullañ diferadenn ar prefeti a roe aotre da astenn an atant. War a seblant n'eo ket bet lakaet e kaoz raktresoù hentennoù desevel leueoù ar C'hooperl gant ar prozeziñ-se, rak abaoe eo bet prenet ganto un eil atant e Skrigneg (29), e kalon Park Naturel Rannvroel an Arvorig. Mantret eo Ariane Malleret, e-karg eus rann al labour-douar gant Greenpeace France : « *Al lañs nevez-se, e kroaz-hent ar stankañ hag ar produiñ, a zo un harz d'an dae a chom, hini ar reneveziñ ar rummadoù labourerien-douar, hag a zo koulskoude ur redi evit diorren an doareoù desevel loened padus ar beizanted.* »

Kristen Falc'hon ha Ivan Logvenoff

8] Diferad-prefed diwar-benn kreskiñ an tiez-feurm a ra gant saout eus ar SCEA Le bas Chemin, Prefeti Breizh ha Il-ha-Gwilen, miz Mae 2019

9] Diell an dalc'hoù publik e lez-varn Roazhon, d'an 19 a viz Here 2023



Lakit hoc'h anv a-benn degemer al lizher-kelaouiñ !
Dedennet oc'h gant ar pezh a c'hoarvez er vro ? Gant an endro hag al labour-douar ? C'hoant 'peus bezañ titouret pa 'vez embannet un enklask gant *Splann!* ? Gall a reoc'h heuliañ ha souten ac'hanomp en ur lakaat hoc'h anv a-benn degemer hol lizher-kelaouiñ bep miz war www.splann.org

Klevet 'peus kaoz eus Splann ! ?

Splann ! a zo ur gevredigezh (mod lezenn 1901) a zo he fal dezhi kas da benn enklaskoù-kazetenniñ poellek evit an dud e Breizh hag ar bed, e galleg ha brezhoneg. E Bro-Dreger, e Gwengamp, emañ staliet.

Erruet eo *Splann !* d'ur mare eo diaesoc'h diaesañ ar jeu evit ar gazetennerien. E Breizh, ouzhpenn 500 kazetenner o doa sinet ul lizher digor kaset d'ar rannvro e 2020 : ganto e oa bet embannet sklaer ez eus diaezamantoù bras evit titouriñ mat an dud diwar-benn industriezh gounez-vouedel ar vro. Kement se a zo, evel-just, chalus-tre evit ar geodedourien. Soutenet eo bet al lizher-mañ gant 50.000 a dud. Kazetennerien 'vez paeet gant *Splann !* a-benn kas enklaskoù don war an hir-dermen. Pep tra a-drugarez d'ar re a harp ar gevredigezh. Embannet e vezont digoust war he lec'hien ha gant mediaoù a genlabour gant *Splann !*

Ur media dizalc'h...

Muioc'h mui e teu da vezañ mediaoù gall e daouarn tiez-bank hag embregerezhioù bras. Ar c'hontrol-mik a vez graet gant *Splann !* Arc'hantaouet e 'vez an enklaskoù gant ar geodedourien 'zo kizidik ouzh frankiz ar c'hazetenniñ.

Tost an holl arc'hant 'vez tapet gant *Splann !* 'zo bet roet gant an dud, en linenn pe dre chekenn. Gall a ra ivez bezañ arc'hantaouet gant kevredigezhioù all a zo kizidik ouzh frankiz ar c'hazetenniñ, pe gant yalc'hadoù 'zo. Met ne 'vez ket degemeret arc'hant na digant embregerezhioù, na digant strolladoù politikel, na yalc'hadoù digant strollegezhioù lec'hel. Gant *Splann !* 'neus ket na perc'henner pinvidik na bruderezh na kevranegerien (actionnaires, en galleg). Ur c'homite evezh a ra war-dro eus pelec'h e teu an arc'hant a-benn ne yafe ket a-enep karta embann *Splann !*

... hag a zifenn an enklaskoù war an hir amzer

Aet eo da vezañ primoc'h-primañ bed ar c'heleier. Ganeomp-ni 'vez difennet ur c'hazetenniñ war an hir-amzer a-benn lakaat ar gaoz war sujedoù kizidik e Breizh. O chom er vro emañ kazetennerien *Splann !* Eus Naoned betek ar Gerveur ha Lannuon e 'vez furchet ganeomp a-drugarez d'an titouroù kaset deomp hag hon labour bemdez.

Krediñ a reomp o 'deus ezhomm ar geodedourien eus enklaskoù don ha sirius a-benn ober o soñj dezho war ar bed. Un doare da reiñ ostilhoù a-benn kompren enkadenn sokial, an endro hag an demokratelezh.

Adkavit ac'hanomp war ar rouedadoù sokial :



@Splannenquetes



@Splannenquetes



Splann lanceur
d'enquêtes



@Splannenquetes



Splann

Gwriziet mat eo *Splann* ! E Breizh. Anat eo e 'vez soutenet ar brezhoneg a zegas pinvidikaez hag ur sell disheñvel en hol labour. An holl enklaskoù 'vez embannet en div yezh d'an nebeutañ.

Ur stumm kevredigezhel

Splann ! 'zo ur gevredigezh lezenn 1901 hag eo dreist-holl dre dud a-youl vat ez a endro. En holl, 25 den ouzhpenn 'zo abaoe eo bet krouet *Splann* !, tro-dro da 15 anezho 'zo kazetennerien. Setu an dud a gemer perzh en emvodoù-meur hag o 'deus droet da votiñ. Klask a reomp e vefe ar muiañ demokratel posubl mont en-dro ar gevredigezh. Gant ar c'huzul embann 'vez dibabet sujedoù an enklaskoù hag ar gazetennnerien a vo o labourat warno. Gant ar c'huzul-se vez roet skoaz ouzh ar gazetennnerien 'zo oc'h enklask. Mont a ra ivez en darempred gant ar mediaoù a embanno pe skigno ar penadoù. Kazetennerien a vicher indi ar re a gemer perzh er c'huzul-embann. Dilennet e vezont gant izili ar c'huzul-merañ hag, izili ar c'huzul-surentez.

Gant kazetennerien pijisted 'vez graet an enklaskoù 'zo bet dibabet gant ar c'huzul embann.

Ober war-dro mont-endro *Splann* ! a vez graet gant ar c'huzul-se. Pep dilennad a zo par d'ar re all a-fed pouezh ha kargoù. Gant bodad-meur ar gevredigezh e vezont dilennet.

Lennit hon enklaskoù diwezhañ war splann.org

- *Breizh : c'hwezh an amoniak er maez*, Caroline Trouillet, miz Even 2021
- *Iberdrola. Pa vez louz ar jeu gant an energiezh « naet »*, Itzel Marie Diaz, Lena Lopes, miz Meurzh 2022
- *Metan : Bec'h d'an atant*, Julie Lallouët-Geffroy, Raphaël Baldos, miz Gwengolo 2022
- *Essure : drouk mouget e korf ar merc'hed*, Juliette Cabaço-Roger, Faustine Sternberg, Guy Pichard, Rozenn Le Carboulec, miz Here 2022
- *Moc'h fall*, Inès Léraud, Kristen Falc'hon, Floriane Louison, miz Gouere 2022
- *Brezel ar parkeier*, Julie Lallouët-Geffroy, miz Gwengolo 2023
- *Cooperl : enklask war un embregerezh pemoc'h ramzel*, Kristen Falc'hon, Ivan Logvenoff, miz Du 2023
- *Keuzioù ha girzhier en arvar*, Yann-Malo Kerbrat, Nolwenn Weiler, C'hwevrer 2024

Ezhomm 'neus ac'hanoc'h Splann !



► A-benn goprañ kazetennerien, tresourien, fredoù-hent hag all 'neus ezhomm ac'hanoc'h Splann ! Evit poent eo bet arc'hantaouet hag embannet pevar enklask a-drugarez d'ho tonezonoù.

► M'ho 'peus c'hoant e vefe kendalc'het da vevañ ar c'hazetenniñ dizalc'h e Breizh, harpit ac'hanomp !

Gall a reoc'h reiñ el linenn war www.splann.org pe dre chekenn :

« Da *Splann !* » eo dav deoc'h skrivañ war ar chekenn ha kas anezhi da *Splann !*,

3 plasenn Maez ar Roue, 22200 Gwengamp

Titouroù da gas deomp ?

Titouroù pouezus evit ar gevredigezh 'zo ganeoc'h ? Dokumantoù kizidig pe danvezioù e rankfe Splann ! enklask diwar o fennoù ?

Kasit deomp ur postel kentañ gant ur chomlec'h hep hoc'h anv (gant un anv fals ma karit) a-benn displegañ deomp eus petra 'zo kaoz berr-ha-berr. Gwelloc'h eo implijout posteloù evel Protonmail. Respontet 'vo deoc'h penaos ober evit kenderc'hel an tabut ha kas deomp an dokumantoù.

Mont en darempred

contact@splann.org

Splann !, 3 plasenn Maez ar Roue, 22200 Gwengamp

Splann !

Ti ar Vro
3, place du Champ-au-Roy
22 200 Guingamp

Penn rener an embann

Alain Goutal

Kazetennerien

Ivan Logvenoff,
Kristen Falc'hon

Skeudenoù

Kristen Falc'hon,
We animals media,
France 3

Bet heuliet gant

Sylvain Ernault,
Faustine Sternberg

Lakaet brav da lenn

Anne Cailliet-Leroy

Troidigezh

Sten Charbonneau

Difazhiet gant

Juliette Cabaço-Roger,
Julie Lallouët-Geffroy

Imprimeur Cloître
ZA Croas-ar-Nezic
29 800 Saint-Thonan

Dépôt légal :
2^e trimestre 2024
ISSN: 2800-664X

